

(436)

Da Vemor Fanch Péron,

Maçonner eus a Droudousten, e Montroulez,
 Pehini en deves gourennet epad eur c'hart-heur diouzh
 eur c'hy clâs, an 20 eus a tris mae dizeza 1842, ha dre e
 gourach dreist-ordinal conservet o buez da galy a dud, en
 eur sacrificia e hini e-unan dre ar brassa generosite.

M'hoi eus eur vech benac roet d'ar Vretonet
 Detaillou a gourach o deves admirer,
 Accomplisset gant tud demeure a Vreiz-Tzel,
 A bere o hano a verzo immortel,
 E tleomp comz ivez hirio a Fanch Péron,
 Scouer ar brassa courach hac enor peb Breton.
 E action zo dign da verza exposet,
 Louz evel ma zeo bet re an oll haroset.

An ugent a vis mae, d'ar güener, da eiz heur,
 Deiz eus ar feat caer, mes, allas! a valeur,
 Fanch Péron a zisquen a Droudousten en kêr,
 Evit mont d'e labour. Rentet var gae Treguer,
 E saillas varnezân eur c'hy voa cunnaret;
 Mes Peron, nerzus bras, en deus en douaret.

(437)

Al boën furius-se savet eus an douar,
 A zail c'hoas ouz Péron, hac a grog en e c'har:
 Péron, leun a gourach, a deu d'er briata,
 A implich e oll nerz evit dont d'er mouga;
 Mes eur c'holier en doa, sivoas! an aneval;
 Ames se, Fanch Peron er mougue sur ractal.

Ar gounnar a beurgresq bars el boën furius:
 Dispen ra e zivrec'h d'ar Peron maleurus!.....
 Daoust d'e oll souffrançon, an haros Fanch Péron
 A stourm d'e adversour, ha ne goll get calon....
 Mar teuje dezân dont da ziscrog ouz ar c'hy,
 Peguement eus a dud e teuje d'attagi!
 Péron sel an dra-ze vel an danjer brassa,

(feat? = fest?)

494

Hac en em sacri-fi vit espern e nessa .
Eur c'hart-keur e voa bet o c'hourey ouz ar c'hy,
Heñ ellout en laqat da zont da ziscregui .

Anfin, an den vaillant en em gar dinerzet,
Hac e cri : n'han Doue, m'ho ped, va sicouret !
An oll zo spouronet Den na grede tostât ;
Diouz ar gombat euzus e clasqet oll pellât .

(438)

Mes Péron o velet, allas ! na elle mui
qement voa dispennet e zivrec'h gant ar c'hy,
A gri : « Eus va godel qemerit va c'houstel,
Hac en hano Doue, lazit al loën cruel !... »

Na eljot get, allas ! dont abenn d'en ober,
Hac e redjot diouc'h-tu da dy un taillanter
Da vit un orz houarn, hac e lazjot ar c'hy .
Ar paour-qez Fanch Péron, sivoas ! na elle mui .

Da dy eur medecin voe neuze cunduet,
Pehini en deves bet e goteriset .

Ar c'hourajus Péron gant calon a zouffras,
Mes e gductor paour var ar plaç a semplas .

Gouliou Fanch Péron voa deut da gleizenna,
Ha ne zanté nep poan, na nep anqen enna .

Abars uquent devez, Péron n'em gar errat,
Hac a ya, joais bras, da gommanç labourat .
Mes goude 'r gousperou, an nao a vis gouere,
Ar paour qez a chommas clân bras var e voele .
Daou vedecin a deu gant hast bras d'e soigni :
Ar malcurus Péron a zouffre poanniou cri .
An deiz varlerc'h e voa e gorf paour bars er be,
Hac e ene eurus a yas varzu an êe .

(439)

An Autrou sou-prefet, qerqent vel ma clêras
E voa maro Péron, gant hast bras a scrifas
Da autrou mër Plouyan ha d'ar gonsellierien,
D'o fedi da nonpas dont da vancout a grenn
Da asista gantân vit an enterramant,
Hac e rojent dezân calz a gontantamant
O tont da enori er quis-se Fanch Péron,
Hac o rentâ hommach d'eur gourach qer guirion .

Sonjit, Montroulezis, d'ar peñz a errije,
Anes courach Péron, dre 'r c'hy counnaret-se !
M'eñ dije ellet mont da reded ar ruyou,
Pet, m'er goulen ouzoc'h, a vije 'victimou ?...

495

(440)

Trugarecomp Doue ma zeus en em garet
 Un den zo e-unan en em sacrificiet
 Erit e guennois, pere n'ancouint bigen
 Ar bonneur a dleont d'eur seurt courajus den!
 Mes, neo get avoalc'h se : bez' so un intañvez
 Ha daou ruguelic qez, pere zo hep danvez.
 Sicouromp anez, hervez m'hon eus moyen;
 Un dever just e zeo, me gred, da hep christen.
 Bezomp - ta, Bretonet, generus evité;
 Ar vad - ober atas a blich calz da Zoue.
 Ha ra verzo bepret e memor heb Breton,
 An act qer burzudus demeus a Fanch Péron !!!...

A. Lédan.

Ar recit. ma a voelizer 10 çantim, e ty Lédan, e profit intañvez
 F. Péron. — Maleurusamant ne zeus bet goerzet nemet erit 8 franc
 80 çantimes, roet gant an autor dar m'er a Blouyan erit rei da intañvez
 Peron.

(Vol. IV, p. 436-440.)